

Rolland Charles

Lanneaou 862 – Gwerliskin 1940)

Kan broaduz Breiz. Bet savet e 1903.

Modernnaet eo bet an doare-skriva..

Kan broaduz Breiz

(Ton nevez deut deuz Breiz-Veur)

RANN KENTA

I

Breiziz, braz ha bihan, kanom gloar d'on gouenn !
Kaerra tud a daol troad dindan ar goabrenn ! !
Kanom oll en enor da Vreiz ha da Frañs
Ha bevom gand peoh ha doujañs.

Diskan

Er Bed tro-dro
Peb rumm-tud a gar e Vro ;
Hag entre ma yelo an Douar en-dro
Ker braz karantez a bado !

2

Ni dreist-oll, gwir Vreiziz, kreñv 'vel an dero,
Kaled 'vel on reier, a gar stard on Bro ;
Menez, saon, tachenn hlaz, leh om diwanet,
Ha leh 'mañ, on zud koz kousket.

Diskan

O Breiz, or bro !
Brava taol-douar a zo ;
Tre ma krozo ar mor dirakout tro-dro,
A rumm da rumm, ni da garo !

3

Ni 'zo eur bobl wirion, laouen deuz on stad !
Ha meum eur yez dispar, giziou deread,
Gwiskamañchou ken brao, tentusa doare,
Oufe rei kaerder d'ar vuhe' !

Diskan

O Breiz, or Bro !
Da viken ni da garo !
Tre ma vo lazou¹ braz, pardonioù tro-dro,
Merhed koant ha bleun er parko' !

4

¹ lazou : son ar hleier.

Ni 'gar 'n em zidui, 'barz en pep tachenn,
Sacha stard war ar maout, redeg er zeyen² ;
Rei da vad tro d'an dañs, c'hweza tantajou,
Kana gwerziou koz ha soniou !

Diskan

O Breiz ! or Bro !
Da viken ni da garo
Tre ma vo eur biniou da zon eun dañs-tro
Kalon pep Breizad a drido !

5

En-kreiz on labouriou ni 'vez bepred ye ;
Prejou braz, nozveziou, tu pe du bemde' ;
Ma vem oll 'skeud on foan evruz deiz ha noz
Gand on yez hag on giziou koz !

Diskan

O Breiz, or Bro !
Leh 'vez plijadur bep tro !
Tre ma vo jabadao, kaniri tro-dro !
Ni 'garo Breiz-Izel, or Bro !

EIL RANN

6

Med daoust dem da garoud kement or bro Breiz,
Ni 'gar or Bro gaer Frañs ken stard all 'n or hreiz,
Ha deuz on savettaet der al Liberte !
Om zennet dindan gazell-ye !

Diskan

Frañs, or gwir Vro !
Da viken ni da garo !
Hag a-greiz or halon beteg ar maro !
Ni harpo stard, Frañs or gwir Vro !

7

Deuz oll broiou ar Bed, Frañs eo ar genta,
Penn-skwer ha stur deze e-barz en pep tra ;
Enni 'mañ war elum an tantad dispar
A domm poblou kêz an Douar !

Diskan

Frañs, or gwir Vro !
Da viken ni da garo !
Tre ma roi deskamant, sklêrijenn tro-dro,
Frankiz, furnez d'ar sperejo' !

² zeyen : ?

8

Terrubl er brezeliou, paotred an Arvor,
'Deus skoaziet o Bro Frañs gand nerz hag enor !
Hg hirie 'barz er peoh gand ar Republik,
Breiziz 'vo ar genta prestig !

Diskan

Frañs, or gwir Vro !
Da viken ni da garo !
Tre ma vo deuz da berz lealded tro-dro,
Unvaniez entre peb Bro !

9

Eun deiz or bugale der ar skiañchou
'Vo gand Frañs evuruz 'hed an amzeriou :
Eur wech 'vo treh ar gwir ni 'vo kaerroh c'hoaz !
Da virviken, Breiziz 'vo braz !

Diskan

Frañs, or gwir Vro !
Da viken ni da garo !
Tre ma'h i war-raog ! war gaerraad bep tro ;
Ar Baradoz er Bed tro-dro ! !

10

O Doue ! kendalhit da skuill ho pennoz !
Grit ma reno dre oll ar peoh deiz ha noz :
'Vid ar Gwir hag ar Mad, ni 'zo prest da zével,
'Vid Breiz ha Frañs prest da vervel !

Diskan

Ya ! on diou Vro !
Da viken ni ho karo !
Hag a-greiz or halon, bepred ni 'garo !
Gloar ha meuleudi ! ! d'on diou Vro ! ! !

Ch. ROLLAND